

An amzer da ganân

Var Dôn ar barz Botorel :

(le soleil tombe)

1

Deut eo an anv ; biao an amzer !
An eol gant e dombder (bis)
Var an douar a skuill bemdez
Al laouenedigez lanlaa !

DISKAN

Kanomp, kanomp ! ^{ne} ma deut an anv
D'an eostik da ganân !

2

Gant an avel an ed melen
a ej, a bleg o fenn ; (bis)
Kourach ! labouerien douar
Ma po eun eost dispar lanlaa !

3

Ema savet en hor prajou
Ar yeot hag ar bleuniou, (bis)
Oh ! nag eo koant hor Breiz-Izel,
Marellet he mantel ! lanlaa !

4

Ar mor zo torret e gounnar
Hag a bok d'an douar (bis)
Var hon aochou tud dinerzet
It da glask ar iec'hed, lanlaa !

5

Al labouset e beg ar guez
A gân ho c'harantez (bis)
Oh ! lezit-hi, bugaligou
Da ober ho neichou, lanlaa !

6

Ema digor ar pardonioù
An ebat, ar gouelioù (bis)
Potred potrezet, bezit fur
Hag e po plijadur, lanlaa !

PAOTR TRÉOURÉ

